

25 MAE

# SANT URBAN I, Pab ha Merzer

Sant Urban I a c'hanas e Rom hag a oa mab da Bontian. Sevel a reas war gador Sant Per goude ar Pab Callixte, er bloaz 222, hag e renas an Iliz betek ar bloaz 230.

Bez e z'oa santel meurbet. Dre skouer e vuhez ha dre e brezegennou e c'hounezas da feiz Jezus-Krist eun niver bras a dud, zoken a renk uhel, evel Valerian, pried Santez Sesilia, ha Tiburs, brour Valerian. Ar re-ma goudeze, a c'hounavas ar verzerenti gant ar brasa-nerz-kalon.

Urban a houestlas ti santez Sesilia evel iliz en enor d'ar Zafver Jezus-Krist. En amzer-se, an dud fidel a roe o feadra d'an Iliz, evit servich an Ao. Doue, evit maga ar veleien hag ar re baour. Urban a c'hourc'hemennas ne vijeat morse lakeat da zervichout da netra all ebet, « rag, emezhan, bez e z' int offransou an dud fidel evit dasprena o lec'hejou ha peadra ar re baour ».

Hen a voe ar c'henta oc'h en em zervichout euz kaluriou arc'hant ha zoken acour fin evit lidou sakr an Iliz, abalamour en e zonzj, netra morse ne c'helle beza re vrao evit an Ao. Doue.

Gouarn a reas an Iliz epad 7 vloaz hag eur miz bennag. Goude beza bet labourer ha gouzaret kalz, ar Prefet Almaque a lakeas kregi ennan, her skourjeza gant foueroù ploum ha trec'h d'ezan e benn; erfin e lakeas tewal e gorf d'al loened gouez.

Goulskoude eur vaquez santel, Marmenia hag he merc'h Lusinia, a zastumas ar c'horf-se hag a enterras anezan e bered Pretextat.

E verzerenti a erruas d'ar 25 a viz Mae 230, en amzer m'edo Alexandr-Sévère, impalaer.

An impalaer-ma n'oa ket enebour d'ar gristenien ha ne bersekutas ket an Iliz. Bez 'en doa soken imaj ar Zalver e chapel e balez, etouez skeudennou e zoueou faoz. Mez etouez e vinistred e oa unan dreist holl, Almague, hag a oa enebour touer da Jezus-Krist ha d'e Groaz, hag a reas kement a c'helle evit diskar ha mouga ar relijion gristen.

Ar Pab, Nicolas I, a leverer, a roas korf sant Urban da venec'h St-Germain a Auxerre, er bloaz 862. Pa z'ear d'e gerc'nat e c'hoarvezas kalz a vuzudou. Abaoue er vro-se, ez cus eun devotion vras evit Sant Urban.

Parrez Lann-Urvan, e Eskopti Kemper, he deus ivez an eur-vad da gaout eul loden eus ar relegou-se. An Ao. L. Toussaint Champion, letanant war batimanchou ar Roue, o roas da famill de Guesbriand, goude beza bet anezho digant e vreir a oa Eskob e Auxerre. Hen-ma en doa digaset anezho eus a Rom hervez paperiou koz parrez Drinon (24 Mae 1763).

Abaoue, Lann-Urvaniz o deus, ha gant reson, eun devotion hag eur fizians eus ar re vrasa en o zant Patron. Eun enor dispar eo evito dougen e relegou hag o heuilh-gant feiz er prosesion.

**KENTEL.**— Evit gounit ar Baradoz, ouezomp maga bepred ar Feiz, beva hervez ar Feiz-se e gwir gristenien, hag anzav ha difenn anezhi, e riskl ar buhez zoken m'ar d'eo red, evel ar Patron St Urban.

BN2-4-027

Saint-Urbain

# Gwerz Sant Urban kenta

Patron parrez LANN-URVAN

War don : RUMENGOL

## DISKAN

**Kanomp, kanomp a-greiz kalon  
Henor ha gloar d'hor Zant Patron,  
Hag en eur vouez, holl a-unan,  
Goulenomp benoz Sant Urban.**

1

Er gêr a Rom e voe ganet  
Ar merzer santel zo karget  
Da vejlha war hon enecou.  
Evit hon hentcha d'an nenvou.

2

Amzer ankenius Hed kant vloaz,  
Sant Per oa maro war e groaz,  
Meur a gant mil a gristenien  
Oa bet evel tan merzerien.

3

Met diwar gwad ar verzerien  
E save bemdez kristenien  
E Rom kant vloaz goude Sant Per  
E kreske bemdez o niver.

4

Evit ober o gouelioù bras  
N'o doa gelllet sevel siouaz  
Nemet eun nebeut ilizou  
Er gêr a Rom hag er meaztjou.

5


E douar sakr o berejou  
Ec'h en em vodent a-wechou  
En toullou dou, en hentcho-keo,  
Tost ar re vras, d'ar re veô.

6

Dre c'hras Doue vit o difenn  
E ouient dibab Eskibien,  
Pabed eus ar re zantela  
Ha ne grenent dirak netra.

7

Goude Kalist, maro merzer,  
E savont war gador Sant Per  
Urban, kenta deus an ano,  
Brudet vel eur Zant etrezo.



8.

Urban, dre skouer ha dre gomzou  
A vag ar feiz er c'halonou ;  
Keleñn a ra e bobl bemdez  
Gant nerz, dousder ha karantez.

9

Prezeg a ra ivez dalc'h mat  
Etouez paianed a bep stad,  
Ha n'ouz ket ped mil anezo  
Ar vadiziant a resevo.

10

Valerian, eur pinvidik,  
A lignez uhel ginidik,  
Pried, santez Sesilia,  
Zo deut etouez ar re genta.

11

Tiburs, e vreur, prestik goude  
A vezo badezet ivez  
Hag an daou vreur a zay eun deiz  
Laouen d'ar maro vit o feiz.

12

Araok mervel, Sesilia  
He deus lezet he feadra  
D'an Iliz e giz aluzen,  
Da denzor sakr ar beorien.

13

Breman an Iliz he dezo  
Tiez ha douar 'n he hano:  
Raktal Urban a zoug lezen  
Evit o miret d'o ferc'hen.

14

Gant profou kaer e vugale,  
Urban a gemenn dizale  
Ober evit ar zakrifik  
Kaluriou arc'hant d'an Iliz.

15

Met an Ifern ne c'houzav ket  
Gant sant Urban beza trec'het ;  
Almak, ar prefet, e kounnar,  
A ya d'e glask dindan zouar.

16

— « Pegoulz e renti, emeza  
« D'in-me danvez Sesilia ?  
« Pegoulz e kinnigi d'az tro  
« Ezans da Zouëou da vro ?

17

— « Da vaga 'r paour, eme ar Zant,  
« E lakan va nebeut arc'hant ;  
« Hag ezansi doueou koad l  
« Gwelloc'h ganen skuilha va gwad ! »

18

Raktal bourrevien didruez  
A sko warnan gant o skourjez  
Evel bourrevien Pons-Pilat  
O skei war benn Her Zalver mat.

19

N'eo ket awalc'h d'ar gouarnour,  
Hag evel Sant Yann Vadezour,  
Gant tud digalon, dizakret,  
Urban kenta zo dibennet.

20

Savit d'an nenv, merzer santel l  
Gant ho kurunen eternel  
E vezo paeet d'oc'h, hep mar,  
Hô trubuilhou war an douar.

21

Eun deiz a deuy, war zouar Breiz,  
Pa vezo bet skignet ar feiz,  
Parrez Lann-Urvan a rento  
Gloar ha mil bennoz d'oc'h ano.

22

Dre ama 'vel er gêr a Rom  
Ar gristenien a ouezo chom,  
Daoust d'an dud dizakr a bep giz,  
Fidel d'o feiz ha d'an Iliz.

23

Hon iliz a e'hellint devi (1)  
Met en hor c'halonou d'eomp-ni  
E klaskint mouga, en aner,  
Karantez Jezuz, Her Zalver.

24

Gant ho skoaze l, o Patron mat,  
Ni gendalc'ho da labourat  
Evit ar vuhez eternel  
A-unan gant hon Tad santel.

25

Gant ho skoazell, ez aimp ivez  
Eun deiz da varadoz Doue  
Da gana gloar da virviken  
Da Jezuz ha d'e verzerien.

A. CONQ

Person Plouñéour-Treaz.

*Imprimatur :*  
*P. Messenger, vikel-vras*  
*Kemper, 12 Here 1942*

(1) An iliz koz a zo bet pulluc'het gant torfetourien d'an 13 a viz du 1904.